

GUERS TRUEZUS

Var sujet an doureyer pere o deus goloet daouzec departa-
mant eus a Franç, epad mis even 1856.

Var ton : *Glac'har ar Ver'hes.*

Prestit oc'h attention,
Bretonet, va breudeur,
D'eur recit trist ha guirion
Eus a vrasa malheur
A ell an den da gompren
Ha Doue da zigass
En créis e grouadurien
Pa ve fachtet siouas !

Ar brezel a zo terrubl
Hac eb compassion,
Mæs en ampech so possubl
En eur intent rêzon,
An antêtamant brassa,
Pa vel coll re a voad,
A deu er fin da blega
Da lezen ferm an droad.

Ar guernes a zo cruel,
Dizesperus meurbed,
Cals a dud a ell mervel
A fors da chom eb boued ;
Mæs pa deu d'an douarou
Refus eost da veva,
E caver lugumachou
Da ramplaç ar bara.

N'en deus eneb ar vocen
Na moyen, na remed,
E falz a ziscar an den
Evel eur parkat ed,
Mæs, pa erru en eur vro
Da zistruj anezi,
E c'hel an dud mont en dro
Evit tec'hal outi.

An tan goal pareillamant
A ra eur goal ravaj,
En eun heur, en eur momant
E ra cals a zommaj,
Mæs pa doler dour varnan
Daoust d'ar ravaj a ra
Ever ractal mæstr dean,
Dont a ra da vouga.

Mæs, pa zorti eur rivier
Dréist e bord gant furi,
Da vont en dro d'an tyer,
Penos e arréti ?
Piou a ell lakat seljuou
D'e ampech da dremen,
Pa zaou dréist ar vogueriou
A c'hoëch mètr pe ouspen ?

Pa falveas da Zoue
Coll ar bed en antier
E ras, en daou uguent de,
Sevel an doureyer
Dréist an ties huella,
Ar gues, ar meneyou ;
Oll e rankchont perissa,
Tud, loénet ha madou.

Em dorn e cren va fluen,
Va goad a zo sklasset,
Va c'halon gant an anken
A zo kasi rannet
Pa velan nac a c'hlac'har,
A gaon, a zizesper,
En deuz gréd an dour barbar,
Var ar mæs hac en kær !

Ar Franç siouas ! se hirio
En desolation,
Scuilla ra daëlou c'hoëro,
Goad a ra e c'halon ;
E diou vrec'h a zo savet
Entrezec an envou
E fultrin a zo fesset
Gant an huanadou.

D'ar bêvar a vis even
Rivier al Loire, ar Rhône
Zo debordet pen da ben
Deus Tours betec Lyon ;
Créis ar Franç, ar zaou ëol
Hac ar c'huz ëol ive
Gant an doureyer dirol
Zo bet goloet tre.

An ties a zifonte
Var passaj an dour bras,
Hac an dud a voa enne
A berisse siouas !
Dindan ar véin dispennet
O tiruil var o fen ;
Ne ell nicun tec'hel
Na memeus caout souten.

Ar vam gæz couls hac an tad
A vele o buguel
Prest dirag ho daoulagad
En dour bras o vervel ;
Caër en devoa peb ini
Essad en eum sicour,
Red e voa n'eum resolvi
Da ruillal gant an dour,

An eost deus ar parkeyer,
Al loénet deus o c'hraou
Ar c'hirri gant an aler
Ar meubl a cals ha draou,
An dillad al lingiri
Hac ar c'horfon maro
A velet oll o flotti
Var an dour dre ar vro.

O velet ker bras distruj
E c'helliet lavaret
E voa erru an diluj
Da lakat fin d'ar bed;
O clévet tud o scrijal
O juntri o daouarn
E c'hellie pob den sonjal
E voa deud de ar varn.

Demeus ar valévruchen
A zo disparisset
N'eus nemert Doue eb ken
A elfe lavaret
Pet a zo ed dirazan
Pet en devez barnet,
Pet a rentas cont dean
Deus ar pes o deus gréd.

Eus an dud o deus ellet
Tec'hal dirac an dour,
E zeus, erves so merket
En gazetennou Tours,
Ouspen c'hoéc'h mil varn'uguent
Eb ty hac eb dillat
Eb tam boued dindan o dent
Eb parc da labourat.

Penos en dije ellet
Cals en eum zovetat
P'è an doureyer savet
Beteg trégont troatat;
Ar re zo bet surprenet
En andrejou izel,
Christènién, anevalet
O deus ranket mervel.

Ractal evel ma klévas
Ar c'hri a zizesper
Napoleon a redas
Var theatr an danger;

Evel eun tad enkeniet
Deus poan e vugale
E zé bet en eum hastet
D'erruout er c'hontre.

Evel ma zé erruet
En kichen an dud kès,
En devez distribuet
D'ar merriou var ar mæs
Couls ha da re ar c'herrion
Arc'hant evit sicour
En o brassa ezomou,
An dud voas eus an dour.

Arok retorn da Baris
En devez visitet
An douarou en languis
Gant an dour distrujet,
Laret en deus e lako
E oll soign da siouall,
Ne errufe c'hoas er vro
Kement-se eur veach all.

Ar famil Imperial,
An Impalaères
A zo deut ive ractal
Da zicour an dud kès;
Ar prinç Jerôm e unan,
(Eus a ze e zon zur),
Da victimou Orlean
En deus roed mil liur.

Gant cals a impressamant
An dud deus a beb stad
O devez roet arc'hant
Hac aour a galon vad
Evit essad rapari
Ar c'hollou anduret
Gant ken alies ini
A zo bet inondet.

En Paris ezeus savet
Eur souscription vras
Evit an dud glac'haret
Gant malheuriou ker bras;
An tri million anter
Savet beteg hirie
A zoulajo ar vizer
Couls hac ar baourante.

Bro ar Franç ken jenérus
E deus evit e lod
Savet d'an dud malevrus
Kement o deus defod
Evit remplaç an dillat
Ar meubl hac an tyer
O deus ranket divoerat
P'è deut an doureyer.

Breïs-Izel nê ket chommet
An divèa da réi,
Eur somm merkabl meurbed
A zo roet enni.
En arc'hant a zo savet
Dre ar souscription
E zeus tost da tri vil scoet
Deus canton Lanhuon.

An deputeet o deus
Votet deg million;
Er vro estranjour memeus
Eus bet compassion
Deus ar francichen scoet
Gant an debordamant,
Hac e zeus bet digasset
Sommou bras a arc'hant.

Breman e fin d'an distruj
An enchon goleet
Gant doureyer an diluj
A zo debarrasset;
Ar rivier zo diskennet
En e boent ordinal,
Doue ra vezo meulet
Ne m'eump ken da zioual.

Pedomp a gréis hor c'halon
Jesus, Salver ar bed,
Da réi consolation
Da re zo savetet
Ha da brizoud réi repos
D'ar re a zo maro,
D'ho lakat er barados
Elec'h ma man o bro.

Propriété.